

Eno, e tal ho tron, Jezuz,
 Ganimp da viken gant ann Elez :
 « Gloar, enor d'ann Oll-C'hallouduz
 « Ha d'ann dud vad, peoc'h ha levenez. »

BARZ SANT-FTAKR.

Quimper, 2 Décembre 1886.

PERMIS D'IMPRIMER

SERRE, Vic. gén.



Quimper, impr. de Kerangal.

D'AR MABIK JEZUZ



Var ann ton gallek :

O Vierge, fontaine et rocher,
 Voyez vos Bordélais fidèles
 Qui reviennent vous saluer
 Et dire à vos rives si belles
 Ave, ave, ave Maria ! (bis.)

DISKAN :

Mabik Jezuz, o va c'harantez,
 Renit, renit, em c'halon bemdez !...

Tal ho kavel, Mabik Jezuz,
 Na douz eo kana gant ann Elez :
 « Gloar en Eny d'ann Oll-C'hallouduz,
 « Ha d'ann dud vad, peoc'h ha levenez !... »

Peoc'h ha levenez hor bezô
 Keit 'ma renfôt, Jezuz, 'n hor c'halon ;
 En hon ene keit ma pado
 Ar garantez peuz bet evidomp.

'N hor c'halonou dridomp gant joa !...
 Kenavo deoc'h, glac'har hag anken !...
 Peurc'hreet eo ar burzud brassa :
 Unanet eo Doue gant ann den !...

Ann ifern a iud gant kounnar,
Ann douar a zrid gant levezeg,
O klevet ar c'helou dispar
Kasset euz ann Env gant ann Elez.

« Ganet eo deoc'h e kear David
« Ar Zalver a c'hortozit keit-so :
« Mab Doue eo, heñ adorit !...
« Baradoz so da neb her c'haro !...

« En eur c'hraouik 'tousez al loened,
« Gant lienach paour 'vit maillurou,
« Var eun dornadik plouz kousket,
« C'hui gavo Mab Doue hon Autrou.

« Kuiteet hen-deuz bar ann Envou
« Evit savetei ar bec'herienn !...
« 'N em vouestlet eo d'ann oll boanniou
« Evit prena eurusted d'ann den !...

« 'Dalek kavel kraouik Bethlehem
« Betek kroaz kaled menez Kalvar
« Jezuz c'houzanvo heb 'n em glemm
« 'Vit ar bec'herien poanniou dispar.

« Vo ket peadra kement-ze
« 'Vit diskuez d'ann dud he garantez ;
« Korf, goad, ene, divinité
« 'N em roi dezho da vagadurez !...

« Var ho auteriu, deiz ha noz,
« Kuzet dindan ar spez a vara
« 'Jommo bepred euz ho gortoz :
« Genel 'n ho c'halon vo he oll'joa !... »

Evit eur garantez ker braz
Penoz diskuez hon anaoudegez ?...
En Env, Jezuz, ho karimp c'hoaz
Anez ve berr kant mill bloaz buez.

Da ginnig deoc'h 'vel donezon
N'hor beuz aour, ezanz, na mirrh ive !...
N'hellomp kinnig 'met hor c'halon !...
He digemerit, o va Doue !...

Siouaz ! hor c'halonik 'zo paour !...
'Vel kraouik Bethlehem diranvet ;
Mes bolontez-vad a dalv aour
Da neb a fell dezhan ho karet.

Plijet ganeoc'h, Mabik Jezuz,
Ober eun auter d'euz hor c'halon !...
Tost deoc'h hebken em omp euruz
'Vel n'oa biskoaz roue var he dron !...

Rag neuze 'kreiz hon oll boanniou
Ni gán 'velato gant levezeg :
« Na douz eo karet hon Autrou
« Evel m'her c'har en Env ann Elez ! »

Ia sur, deoc'hui, Mabik Jezuz,
Ni fell deomp oll beza da viken !...
Kenavo 'ta did, bed trompluz !...
Da Jezuz omp, da Jezuz hebken.

Da Jezuz omp, braz ha bihan !...
He c'hourc'hemennou douz ha santel
A c'heullimp bepred er bed-man
Hag hor bo baradoz eternal !...